




KENVREURIEZ AR BREZONEG

36

n° 36

TAOLENN AN NIVERENN 36.

2) Pedom evid an Anaon:

- | | |
|---------------------------------------|------|
| a) ar himiad diweza | p 31 |
| b) An overenn deiz-ha-bloaz | p 42 |
| c) D'an 2 a viz Du (Gouel an Anaon) | p 46 |
| d) Overennoù all evid an Anaon. | p 49 |
| e) Redennoù all evid an dud tremenet. | p 54 |

Aotr. Job SEITE, Skol an Aod, 29249-GUISSENY
CCP I738-66 Rennes

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

- 1) "Levr-overenn"
gand eur golo ler drevezet: 50 lur
gand eur golo plastik : 36 lur + mizou
gand eur golo paper kalet: 32 lur kas.
- 2) Komz Doue en overenn: Levr T : 30 lur
- 3) Komz Doue en overenn: Levr A;B;C; pebhini: : 20 lur
- 4) Ar briedelez: 8 lur
- 5) An Nouenn: 8 lur
- 6) Cantiques bretons du Diocèse de Quimper et de Léon. Livre d'ac-
compagnements (5ème édition) : 33 lur
- 7) Kroaziou keltieg (Bleun Brug) : 3 lur

Troidigeziou aotreet da arnod
evid an eskobti a-berz an Ao. F. BARBU
eskob Kermper ha Leon.
Kemper, d'an I9 a viz mae 1975
Visant FAVE, eskob-skoazeller.

D'AL LENNERIEN.

War binviliikaad ez eom gand ar pennadoù embannet evid al liderez e brezoneg; n'eo ket echu avad an abadenn, pell ahano !

Eun dachenn all a zo ma'z om paourroù ganti: ar muzik.

Kantikou nevez a ra diouer deom hag ivez toniou nevez da lakaad war lod diskanou, meulganou, pedennou-berr....

Savet ez eus bet kantikou nevez; med re nebeud a zo anezo ha n'int ket anavezet. Penaoz e vefent anavezet pa n'o haver ket embannet. Al levr "Cantiques Bretons Harmonisés" (Marrec) a gaver ennañ meur a gantik nevez. Penaoz e vefent anavezet pa ne vezont kanet nemed amañ hag a-hont, awechou ? Perag ne vefe ket enrollet war bladennou pe lurennou (1) ar hantikou nevez, a yafe evel-se euz an eil d'egile. Evid an overenn lidet e brezoneg e kaver pladennou enrollet, o goulenn digand Rog. Abjean, Montroulez; pe digand A.O. Person Gwerleskin-pe c'hoaz digand Aotr. Kure Plounevez Lochrist.

War-raog e rankom mond ivez war an dachenn-se. Goulenn a reom digand ar varzed, ar varzed yaouank dreist-oll, tostoh m'emañt ouz tro-spered ha tro-santoud on amzer, sevel kantikou nevez. Evid komz euz barzoniezh e tlefed beza barz. N'eo ket awalh gouzoud renka klotennou heson (2) evid beza barz. Hag evid sevel kantikou, e ranker kaoud ouzpenn eur galon greduz a darz anezi ar bedenn da Zoue, eur bedenn hag a zo eun hekleo euz ar zantimañchou a ziwan e kalon ar gristenien; re aliez n'o-devez mouez ebed evid o displega anezo o-unan. Kantikou a zo, a zoñjer da genta ez int kaer ha padal ne gavont dason(3) ebed e kalon ar bobl; bez'ez int evel eur boked goañvet a-veh digor, ne badont ket.

E galleg e vez savet kantikou nevez a-vernioù beb bloaz; pegeid e padont ? Hini pe hini-dre douez- a vo kanet a-rumm-da-rumm evel or hantikou koz brezoneg.

Red eo ivez kaoud muzikerien ampart ; an ton a zo evid ar hantikou evel diaskell. Eur hantik awenet (4) mad a raio berz (5) mar deo toniet e-doare da blijoud d'an dud. Hag amañ adarre e ranker delher kont euz an dud, euz ar vro, euz red anzer a rummad da rummad. Bez' e heller lakaad toniou koz or hantikou war gomzou nevez; gwelloc'h avad a zo da ober. Amañ ivez beza euz on amzer.

Beh eta d'al labour ! barzed ha muzikerien yaouank; eul lañs nevez a vo roet d'ol liderez. Meuleudi d'ar re o-deus klasket ha d'ar re a glasko. Ni a garfe embann war "Gaierou" ar Genvreuziezh kantikou ha toniou nevez e-leiz; lod a vo skubet a-bred hag ankounac'heet buan, lod all a bado.

K.ar B.

(1) bandes magnétiques

(2) rimes harmonieuses

(3) écho

(4) inspiré

(5) aura du succès.

LID AR HINIAD (PE AR HENAVO) DIWEZA

Kerent ha mignoned a zo bremañ o vond da gimiada diouz an hini
emaer o vond da gas d'ar vered. Ar maro a zo atao eun disparti, med ar gristenien,
izili euz ar Hrist, n'hellont ket beza dispartiet da vad, pa na reont nemed unan ennañ.

Aez eo kompren n'eus tu ebed da ober al lidou-mañ nemed ha war al leh
e vefe ar horv. Koulskoude, ma ne vez ket bet kavet ar horv, -lakom pa vez bet kollet
er mor- e heller hen ober; ne vo neuze avad na dour benniget nag ezañs.

Evid al lidou-se ez a ar beleg tost d'an arched.

-Da genta eur bedenn avid an digor.

-Goude-ze kan ar henavo diweza. Evid ar han, ober euz ar gwella evid ma
kemero an oll perz ennañ. A-hend-all ober pedennou berr, peadra da rei fiziañs hag
esperañs.

-Goude-ze strinka dour benniget, war ar horv ha lakaad ezañs da vogedi
endro dezañ da zigas da zoñj euz ar vadiziant ha diskouez doujañs evid kory an den
hag evid kory ar hristen a zo bet "Templ ar Spered Santel". Ar vadiziant eo al
liamm a zeu da unani er feiz an dud a zo en iliz hag o breur eet da anaon. Ablamour
da ze eo mad e teufe an oll goude ar beleg da daoler dour benniget war ar horv. Ar hiz-
se a zo chomet beo e kalz parrezioù en or bro.

-Ar bedenn evid ar henavo diweza a vo lavaret gand ar beleg dioustu goude
ar han ma tle an oll dond da daoler dour benniget war ar horv; a-hend-all e vo lavaret
dioustu m'e-no ar beleg taolet dour benniget.

Ma teu an oll da daoler dour war ar horv eo mad kaoud eun doare
muzig bennag; ar memez tra e-keid ha ma vez ar horv o vond er mêz euz an iliz pe
c'hoaz eur han, dreist-oll ma'z eus eul laz-kana.

I-PEDENN D'AN DIGOR

Ar beleg a ya dirag ar horv, troet war-zu an dud hag e lavar eun dra
bennag evel-henn en eur zelher kont euz an doare tud a zo dirazañ.

Araog mond peb -hini diouz e du
e lavarim asamblez eur henavo diweza
d'or breur N...

Gand resped ha karantez, fiziom anezañ e Doue,
en or halon an esperañs d'en em weled endro eun devez.

(pa vo treh d'ar maro karantez an Aotrou Krist,
trehour war beb droug.)

Soñjom ervad....

Soñjom en or breur A...

en devezioù bevet asamblez gantañ

er pezh m'eo bet evidom...

er pezh m'eo bet evid Doue....

Sioul eur pennad da bedi)

-2-

Deuet eo ar mare da lavared kenavo ar baradoz da A...
 Emaom o vond d'en em zispartia dioutañ
 ha war-nez e guitaad er bed-mañ.
 N'eo ket heb tristidigez eo, a dra zur,
 med an esperañs a jom beo ha stard ennom;
 Esper on-eus da weled endro or breur
 pa zeuio Doue d'on unani e levenez e Rouantelez.
 Soñjom ervad...
 Soñjom en deveziou bevet assemblez gantañ...
 er pezh m'eo bet evidom...
 er pezh m'eo bet evid Doue.....

(Sioul eur pennad da bedi)

-3-

Emaom o vond da gimiada diouz A...
 Da houzañv e-neus bet, labouret e-neus...
 (Servichet e-neus)(Karet e-neus)(e dud)(e nesa)....
 ha kement-se, her gouzoud a reom, a jom.
 En em guitaad a reom med n'eo ket heb esperañs:
 Ni a oar e-neus an Aotrou Krist,
 renet, En ivez, buez mab-den
 hag eo e garantez treh d'ar maro,
 Assemblez emaom hirio evid ar henavo diweza,
 Assemblez eh en em gavim eun devez.
 Gand an esperañs-se e vo c'hwekoh or pedenn.

(Sioul eur pennad da bedi)

-4-

Or breur a zo eet d'e gousk diweza
 e peoh an Aotrou Krist.
 Fizioud a reom anezañ e karantez Doue, on Tad,
 leun a feiz hag a esperañs er vuez peurbaduz.
 Ambrougom anezañ dre or pedenn.
 Renk e-neus kemeret e-touez bugale Doue dre ar vadiziant,
 (Perz e-neus kemeret e pred or Zalver, e sakramant an Aoter
 ha kavet eno sklerijenn ha nerz;
 Ra vo pedet bremañ ouz taol an Tad, er baradoz.)
 Ra zeuio dezañ da heritaj, gand ar zent,
 ar vuez peurbaduz prometet deom.
 Pedom ivez an Aotrou evidom on-unan
 ma'z aim ivez, eun devez, goude poaniou ha daelou,
 a-unan gand or breur, en arbenn d'an Aotrou Krist,
 pa zeuy e-kreiz e hloar, en hag a zo or buez.
 Chomom da bedi ha da brederia eur pennad
 Douget ha maget gand an esperañs.

(Sioul eur pennad da bedi)

II-KAN pe bedennou berr.

Bez' on-eus kantikou anavezet evel:

Baradoz dudiu	(Kantikou N° 35; Ton: Marrec)
Jezuz pegem braz ve	(Kantikou N° 34; Ton: Marrec)
Doue gwir bried	(Kantikou N° 41; Ton: Marrec)

Ma n'eo ket êz lakaad ar braz euz an dud da gana, eo gwelloh ober pedennou berr e-doare ar re a gaver amañ warlerh.

-I-

- A) Tad leun a vadelez, ennoh e fiziom bremañ
an hini en em gav war dreuzou ho ti.

R/ Digorit dezañ ho paradoz
ma'z ay ganeoh da repoz.

pe c'hoaz: Pardonit dezañ va Doue
ha pardonit deom-ni ivez.

Roit dezañ dre ho pasion
euz e behejou gwir bardon.

Grit dezañ ren eur vuez nevez
er baradoz gand an êlez.

Diskuiz peurbaduz d'e ene
en ho kichen, Aotrou Doue.

- B) Teñvalijenn ar maro warnañ a zo kouezet
Grit ma tarzo evitañ heb diskar ho sklerijenn.

- C) N'ema mui en on touez, ra vo en ho kichen !
Ni a oar ez oh mad da rei digor, da bardoni.

- D) Deuet eo da veza ho mab da zeiz e vadiziant
pa redas war e dâl dour ar vuez peurbaduz.

- E) Deoh eo dija, prenet gand gwad ho mab
grit dezañ beva en ho kichen ha kaoud lod en ho kloar
(a-zav eur pennad)

-A. or breur, lavared a reom deoh: "Kenavo ar baradoz"!
Kenavo an deiz dudiuz m'en em welim endro.

-2-

Trei a reom war-zu ennoh, Aotrou Doue,
en euz zoñjal en or breur (or hoar)
Lavarom asamblez:

R/. Etre ho taouarn va Doue
e lakom e ene (1)

-Ra vo e lod bepred
ar peoh en ho kichen.

-An Aotrou Krist d'e zigemer
gand an oll dud tremenet.

-Ho servicher da gaoud perz
e levenez ho mignoned.

-Dezañ ar joa d'ho kweled
da dañva hoh eürusted.

-Ma teuio ar zoñj anezañ
d'or ren bepred tostoh deoh.

-3-

An hini e-neus or huiteet, fiziom anezañ e madelez Doue:

R/. Roit, Salver Jezuz, d'an hini a garom
dor zigor en ho paradoz.

-Salver Jezuz, gouela ho-peus greet d'ho mignon Lazar,
Deuit da zeha on daelou; ni ho ped Salver Jezuz.

-Lakeet ho-peus tud varo da veva endro,
Roit d'or breur ar vuez peurbaduz, ni ho ped Salver Jezuz.

-Santelleet ho-peus A.... gand dour ar vadiziant,
Roit dezañ bremañ en he haer buez bugale Doue,
Ni ho ped Salver Jezuz.

-Maget ho peus anezañ euz ho korv er Zakramant
Roit dezañ bremañ plas ouz ho taol en ho Rouantelez,
Ni ho ped, Salver Jezuz.

-Gouarnvet ho-peus ar maro dre garantez evidom
ha treh oh bet d'ar maro evid deom kaoud ar vuez,
Lakit an esperañs da vleunia en or halonou,
Ni ho ped Salver Jezuz.

EZANS HA DOUR BENNIGET

Lavared a heller araog ezañsi:

-A...evid diskoez on doujañs evidoh
e tevom ezañs dirag ho korv,
ra bigno da heul an ezañs
or pedenn warzu Doue.

hag araog taoler dour benniget war ar horv:

-Eun deiz da zond ni a zavo oll euz a varo da veo;
Setu aze or hredenn hag on esperañs !
Evel ar merk euz or feiz
e vennigan ar horv-mañ
en ano an Tad, hag ar Mab hag ar Spered Santel.

PEDENNOU EVID LID AR HENAVO DIWEZA.

(Da zibaba hervez an doare tud a zo en iliz).

-I-

Aotrou, on Doue,
erbedi a reom deoh or breur (or c'hoar)
e garet ho-peus hed-a-hed e vuez (he buez)
diwallit anezañ (anezi) bremañ diouz peb droug.
Kuiteet e-neus (he-deus) ar bed-mañ, ha n'eo ket greet evid padoud;
renit anezañ (anezi) beteg ennoh, en ho pro
el leh n'eus mui na kañv, na dael, na poan
med levenez ha peoh,
gand ho Mab hag ar Spered Santel
da viken.

-2-

Salver Jezuz,
Taolit eur zell a garantez war ar re a zo e kañv,
Selaouit ouz ar pedennou a reont evid an hini
emaint e ouela dezañ (dezi).
N'eus nemedoh hag a ve santel
n'eus nemedoh hag a ve gouest da drugarezi:
Roit d'or breur (d'or c'hoar) ar pardon euz e behejou (he fehejou).
Gouzañvet ho-peus mervel
evid ma vefe salvet an oll dud
ha ma tremenfent euz ar maro d'ar vuez.
Na lezit ket A... da jom pell diouzoh
med peogwir eo ho karantez treh d'ar maro,
grit dezañ (dezi) beva er sklerijenn, en eürusted, er peoh,
da viken.

-3-

Doue on Tad,
Startait or feiz hag on esperañs
e keid ma kimiadom diouz or breur A...(or c'hoar A...)
C'hwi a oar petra eo bet e vuez (he buez)
ha pegement e-neus (he-deus) poaniet ha labouret...
Ho pedi a reom:

(D'ar re a gendalh gand e labour war an douar
kaoud doujañs evid ar pez a oa santel ha braz evitañ-(eviti)-)

Ra vo pardonet dezañ (dezi) kement e-nefe (he defe) greet a fall
ha ra vo digollet euz kement e-neus greet a vad.
Dre Jezuz, ho Mab, marvet ha dazorhet
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Santel
bremañ ha da viken.

-4-

Tad, leun a vadelez,
etre ho taouarn e lakom ene or breur (or c'hoar)
gand an esperañs eh adsavo a varo da veo
ar re oll a zo e peoh an Aotrou Krist
Hag e vezint gantañ da viken.

(Meuleudi deoh
evid kement e-neus (he-deus) resevet A... diganeoh er bed-mañ;
aze e welom merkou euz ho karantez
hag euz komunion ar Zent.)

Doue k arantezuz,
 Selaouit ouz or pedenn evid an hini a zo o paouez or huitaet
 (Digorit dezañ -dezi- ho ti)
 Ha ni, hag a jom war an douar war e lerh
 grit ma kavim nerz-kalon ha konfort
 er garantez a zo etrezom hag en or feiz
 beteg an deiz ma teuh d'or boda asamblez
 or breur (or c'hoar) ha ni, en ho kichen.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

-5-

Doue oll-halloudeg,
 Dre Jezuz Krist, ho Mab, o vervel war ar groaz,
 ez oh bet treh d'or maro deom-ni;
 dre Jezuz Krist, oh adsevel e-kreiz ar hloar,
 ho-peus krouet ahanom endro evid eur vuez peurbaduz;
 Selaouit bremañ ouz or pedenn
 evid A... a zo maro en Aotrou Krist
 hag a zo o hortoz an adsao d'eur vuez a eürusted;
 Plijet ha gand ho madelez
 ez afe da gana ho kloar da viken er baradoz
 goude beza oh anavezet dre ar feiz war an douar
 Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

-6-

Sammet gand ar boan, Aotrou, hoh aspedom gand fiziañs:
 C'hwi eo an Doue a garantez
 a zelaou ouz pedenn ho pugale.
 Bezit soñj euz ar pez ho-peus greet
 evid ho servicher A... or breur (or c'hoar)
 Da zeiz e vadiziant (he badiziant) ho-peus e lakeet e renk ho pugale;
 bremañ, p'e-neus (p'he deus) kuiteet ahanom,
 roit dezañ (dezi) lod e levenez ar zent, ho mignoned
 digemerit anezañ (anezi) en ho kichen
 e bro ar sklerijenn hag ar peoh.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

-7-

Aotrou Doue, ar maro a zo deuet d'o skei
 med gouzoud a reom ez oh ar vuez
 hag ema ennoh evidom an eürusted.
 Felloud a ra deomp lavared deoh endro,
 deoh ha deom-ni on-unan
 e-neus ho mab Jezuz on dasprenet
 dre e varo hag e adsao da veo.
 Taolit eur zell a vadelez war ho servicher A... or breur (or c'hoar)
 E-keid ha m'edo en on touez e-neus (g he-deus) kredet
 e mister adsao ar Hrist euz a varo da veo,
 Ra vo roet dezañ(dezi) bremañ kaoud da viken
 al levenez da veva en ho kichen.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

EN EUR ECHUI AL LIDOU EN ILIZ

A- M'e-neus ar beleg taolet dija dour benniget war an arched:

I) e heller dioustu kana eun antivonenn pe eur hantik evel

"D'ar baradoz" (in paradisum) a gaver el levr an AO. Marrec p.II3

D'ar baradoz, ene kristen
Bezitdouget gand an êlez
ar verzericn d'ho tigemer
E Rouantelez kaer Doue.

An oll êlez ouz ho reseo
'kichen Lazar, den paour gwechall
ra vo plas deoh evid tañva
peoh ha diskuiz da virviken.

" D'AN ANAON."

(I) Marrec p.I95

D'an Anaon a zo e-kreiz ar boan
er purgator o houlenn heb ehan
ma paouezo o finijenn galed
roit sikour, o gwerhez benniget, o Maria.

Feunteun zinamm a walh ar pehejou
Mamm druezuz ouz an oll ezommou
Klevit pedenn an anaon klemmuz
Roit dezo an diskuiz peurbaduz. O Maria.

Pa vo deom-ni deuet pred ar maro
Pa'z eo ho Mab an hini or barno
Grit ma venno digeri deom an hent
da gemer lod e levenez ar zent. O Maria.

2) Ar beleg a hell ivez lavared komzou a gimiad evel-henn:

Kement merk a garantez pe a vignoniaj
a vo roet ganeoh,
ra vezint evidoh eur zin euz ar peoh
on-eus klasket asamblez.
It bremañ e peoh an Aotrou Krist.

B) Mar dema ar hiz d'an oll da daoler dour benniget war an arched, ar beleg
hen ra da genta hag a bed an dud da ober kemend-all en eur lavared:

A...or breur , (or c'hoar)
evid merka or himiad diweza deoh
peb-hini ahanom a zo bremañ
o vond da ober sin ar groaz warnoh
gand an dour a zigas da zoñj euz ar vadiziant.
Ra zeuio pedennou ho kerent hag ho mignoned
bodet endro deoh,
ha ra zeuio ivez karantez an Aotrou Krist
hag a zo bet treh d'ar maro,
da dalvezoud deoh kaoud bremañ ha da viken
peoh ha levenez bugale Doue.

(I) Diwar al "Languentibus" savet gant Wann a Langoueznou, Manati Landevenneg.

(E-keid ha m'ema an dud o tremen dirag an arched e vo kan pe vuzig)

Mañ eer e prosesion d'ar vered warlerh ar horv, e heller kana hini pe hini euz ar salmou a gaver el levr-mañ N°

DIRAG AR BEZ

(Eur ger araog ar bedenn; eun dra bennag evel-henn):

- Er vered emaom, e-leh m'eo bet-beziet kemend-all a dud euz or familhou, a-raog an hini e-neus or huiteet.
- Ei-leh ma feuer da bedi war beziou ar gerent evid deski gand an dud tremenet penaoz startaad or feiz hag on esperañs.
- Chomom sioul eur pennad.... Soñjom e Doue.

Pedennou berr

Anaoud a reom ar pezh a lavaras Jezuz da c'hoar e vignon Lazar nevez marvet.

"Me eo an adsao da veo hag ar vuez.

An neb a gred ennon, ha pa vefe maro a vevo...."

Erbedom or breur (or c'hoar) d'on Tad euz an neñv, an Doue madelezuz ha lavarom:

R/.Digorit dezañ (dezi) Aotrou, dor ho paradoz.

-Salver Jezuz, c'hwi hag ho-peus gouelet dirag bez : ho mignon Lazar,
Deuit da zeha on daelou ha d'or frealzi, ni ho ped.

R/.Digorit dezañ, (dezi) Aotrou, dor ho paradoz.

-C'hwi hag ho-peus roet ar vuez d'ar re varo,
Roit d'or breur (d'or c'hoar) ar vuez peurbaduz, ni ho ped. R/.

-C'hwi hag ho-peus benniget dour ar vadiziant
roit d'or breur(d'or c'hoar) buez bugale Doue, ni ho ped. R/.

-C'hwi hag ho-peus e vaget (he maget) hand ho korv sakr er zakramant,
roit digemer dezañ (dezi) ouz ho taol en ho Rouantelez, ni ho ped. R/.

-C'hwi hag a zo marvet dre garantez evidom hag a zo bet treh d'ar maro evid m'or-befe ar vuez,
lakit an esperañs da vleunia en or halonou, ni ho ped. R/.

Respoñchou all a vefe gellet lavared, evel:

ROIT DEZAN (DEZI) AOTROU AR REPOZ VAD PEURBADUZ.

pe: D'AN ANAON..... (Marrec N° 187)

Asamblez: ON TAD HAG A ZO EN NENV.
pe unan euz ar pedennou amañ warlerh.

-I-

Aotrou Doue, c'hwi a zelaou ar pedennou c'hweg a bign davedoh
ha ne rit ket skouarn youzar ouz ho pugale;
Beteg amañ on-eus ambrouget ho servicher (servichérez) A...
douget gand or harantez evitañ (eviti).
Grit ma kavo en ho kichen peoh ha levenez
gand ar re a halvit da gemer plas en ho Rouantelez.
Dre Jezuz, ar Hrist, on Aotrou.

-2-

(Dreist-oll ma n'eo ket bet benniget c'hoaz ar bez)

Aotrou Jezuz Krist, a-raog adsevel a varo da veo
ez oh chomet tri devez en douar.
Abaoe an deveziou-ze ar bez a zo deuet da veza evid ar gristenien
eur zin a esperañs en adsao da veo.
P'emaom bremañ o vond da ziskenn or breur(or c'hoar) er bez
e teuom d'ho pedi:
C'hwi hag a zo an adsao hag ar vuez:
Roit da A... ar hras da veza e peoh er bez-mañ
beteg an deiz ma vo dihunet ganeoh
evid ma welo gand e zaoulagad
ar sklerijenn heb diskar, da v iken.

--3--

Aotrou Doue, c'hwi eo ho-peus roet deom ar vuez,
c'hwi eo a roio endro ar vuez d'or horvou tonket d'ar maro.
N'emaoh ket pell diouz ar re ho kalv
ha digemer mad a rit d'ar beherien a zo ahanom.
Gwelit penaoz ez om doaniet
Selaout ar bedenn a gasom beteg ennoh evid A...
Ra vo dilivret diouz ar maro
ha karget euz levenez ar baradoz
gand an oll zent,
Dre Jezuz, ar Hrist, on Aotrou. AMEN.

-4-

Aotrou Doue oll-halloudeg, dre Jezuz Krist, ho Mab, o vervel war ar groaz,
ho-peus distrujet ar maro;

Dre Jezuz Krist oh adsevel a varo da veo leun a hloar,
ho-peus greet ahanom krouadurien nevez evid ar vuez peurbaduz.

Plijet ganeoh bremañ ober digemer vad d'ar bedenn a gasom beteg ennoh evid A..
a zo maro en Aotrou Krist hag a zo bremañ o hortoz an adsao da viken.

Anavezet e-neus (he-deus) ahanoh dre ar feiz ekeid ha m'edo o veva war an
(douar,
grit bremañ ma rento gloar deoh da viken en eürusted ar baradoz.
Dre Jezuz Krist, ar Hrist, or Zalver. AMEN.

Aotrou, on Doue,
 Bezit trugarezuz e-keñver ho servicher (ez)
 Grit ma n'e-no ket da veza kaztizet evid e behejou
 peogwir e-noa c'hoant da jom en ho karantez;
 Unanet e oa dre ar gwir feiz gand ho pobl fidel;
 Ra zeuio bremañ ho madelez da unani anezañ(anezi)
 gand an élez en ho paradoz.
 Dre Jezuz, ar Hrist, on Aotrou.

PEDENN DA VEZA LENNET GAND HINI PE HINI EUZ AN DUD KAR.

A...Setu echu ho puez en on touez;
 med dond a raim amañ c'hoaz
 evid kaoud soñj
 evid kendelher asamblez ganeoh, evel m'en-eus greet betek-henn
 e-pad ar bloaveziou tremenet.

Amañ emañ, en ho kichen,
 d'ar mare ma teuit da veza unanet startoh ganeom
 hag en eun doare nevez.
 Al labour boulhet ganeoh, re all a gendalho gantañ.

Ha bremañ, Aotrou Jezuz Krist
 warzu ennoh eo e troom or zellou
 C'hwil, unan ahanom, c'hwil brasoh egedom:
 Ar pezh ho-peus bevet war an douar-mañ
 a gendalh hag a red drezom-ni;
 hag al lusk ho-peus roet d'or buez
 piou a herzo outañ ?

C'hwil a gav an den e wir a dremm ennoh
 C'hwil or galv da bignad atao uheloh
 C'hwil a zo dija en darempredou a zeu da unani an dud kenetrezo
 C'hwil, Jezuz Krist, grit deom chom en or zav,
 Sikouret gand ar garantez-se a zo treh d'ar maro.

PEDENNOU DA VENNIGA AR BEZ

Aotrou Doue, leun a drugarez,
 (C'hwi hag a ro ar peoh da eneou an dud just),
 Plijet ganeoh benniga ar bez-mañ
 (ha kas hoh el da ziwall anezañ).
 Deuit da zilivra euz oll liammou ar pehed
 ar re a zo beziet amañ,
 evid ma kavint ennoh o levenez evid atao
 gand ar zent euz an neñv.
 Dre Jezuz, ar Hrist, on Aotrou. AMEN.

-2-

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus krouet an neñv hag an douar,
 krouet ho-peus a-nevez e dour ar vadiziant
 an dud chadennet gand ar maro;
 Fellet eo ganeoh e teufe Jezuz Krist, on Aotrou,
 da d'eri doriou an iverniou,
 da zilivra ar re a oa o hortoz e zonedigez
 ha da adsevel euz a varo da veo evid or zilvidigez.
 Taolit bremañ eur zell war ar bez-mañ:
 ra vezo ennañ ho servicher(ez) e peoh,
 o hortoz an deiz ma teuoh da varn,
 ha deiz an adsao da veo gand an oll zent.
 Dre Jezuz, ar Hrist, or Zalver. AMEN.

-3-

Aotrou; on Doue,
 ar maro a bouez war an den
 evel eur zamm evid beza dizentet ouzoh;
 med treh e vo ar vuez d'an deiz diweza
 evid ar re a droio ouzoh.
 En esperañs a gement-se e oa beziet Abraham
 en douar ho-poa prometet dezañ,
 hag e oe laket korv Jezuz er béz
 pourchaset gand Josef Arimatea.
 Deuit da venniga ar béz-mañ
 a zo o vond da reseo korv A..., ho servicher (ez);
 e lakaad a reom en douar:
 ra gavo e ene plas er baradoz.
 Dre Jezuz, ar Hrist, on Aotrou. AMEN.

-4-

(Evid béz eur hrouadur)

Aotrou Doue trugarezuz
 (C'hwi hag a ro ar peoh da eneou an dud just);
 plijet ganeoh benniga ar béz-mañ
 (ha kas hoh el d'e ziwall)
 Roit digemer en ho kichen d'ar hrouadur-mañ,
 a zo e gorv amañ e peoh.
 Grit ma kavo ennoh levenez
 gand oll zent ar baradoz hag evid atao.
 Dre Jezuz, ar Hrist, on Aotrou. AMEN.

OVERENNou ALL EVID AN ANAON.

I- AN OVERENN DEIZ-HA-BLOAZ

(a hello servichoud ivez evid an overenn eizvetez pe evid overenn ar miz, gand nebeudig a dra da jeñch awechou.)

A) ER MEZ EUZ AN AMZER-FASK:

KAN D'AN DIGOR: (Disk 2I/4)

Seha a raio Doue an oll daelou euz on daoulagad,
hag ar maro ne vo mui anezañ;
ne vo mui na kañv, na klemm, na poan,
rag ar bed kenta a vo eet da get.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou, bez'ez oh buez ho tud fidel,
bez'ez oh gloar an dud just,
hag ho Mab eo e-neus on dasprenet
dre e varo hag e adsao da veo;
Taolit eur zell a vadelez war ho servicher (ez) A...
peogwir e-neus (he-deus) kredet en adsao an Aotrou Krist,
grit dezañ(dezi) tañva an eürusted na vo fin ebed dezi.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

pe:

Aotrou Doue, gwasket eo or halon gand ar maro,
med gouzoud a reom ez oh ar vuez
hag ema on eürusted ennoh.
Felloud a ra deom lavared c'hoaz deoh, ha deom on-unan,
e-neus ho Mab on dasprenet oll
dre e varo hag e adsao da veo.
Taolit eur zell a vadelez war ho servicher, or breur
(ho servichérez, hor c'hoar)
E-keid ha m'edo en on touez
e-neus kredet e mister adsao da veo an Aotrou Krist.
Grit m'e-no (m'he-do) evid atao
an eürusted da vevañ en ho kichen.
Dre or Zalver Jezuz Krist....

WAR AR PROVOU:

Taolit eur zell a vadelez, Aotrou Doue,
war ar provou a ginnigom deoh
evid ho servicher(ez) A...
Ra zeuio an overenn-mañ d'e hlannaad (d'he glannaad) da vad
ha da dalvezoud d'ezañ(dezi) en ho kichen
an eürusted hag ar gwir vuez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

KAN D'AR GOMUNION:

(Yann II/25 ; 3/36 ; 5/24)

"Me eo an adsao da veo hag ar vuez," eme Jezuz.
 An neb e-neus feiz ennon e-neus ar vuez peurbaduz;
 ar varnedigez n'eo ket evitañ,
 med tremenet eo euz ar maro d'ar vuez."

GOUDE AR GOMUNION:

Kennerzet gand ar Zakramant, Aotrou Doue,
 ni a zeu d'ho pedi gand eur galon izel:
 Roit d'ho servicher(ez) gand ar pardon euz e behejou(he fehejou)
 teñzor ar vuez peurbaduz
 pourchaset en ho Rouantelezh dre adsao da veo ho Mab.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

B) ER MEZ EUZ AN AMZER-FASK:KAN D'AN DIGOR:

Aotrou Jezuz, roit ar peoh peurbaduz
 d'ar re ho-peus evito skuillet ho kwad priziuz.

PEDENN D'AN DIGOR:

Dond a reom davedoh, Aotrou,
 evid erbedi deoh eur wech c'hoaz
 ho servicher A. Or mignon,
 e-neus kuiteet ananom bloaz a zo.
 Ne fell ket deom e zizoñjal,
 N'it ket d'e zizoñjal, c'hwi kennebeud;
 Grit ma welo, pelloh, pegen braz eo ho karantez
 ha ma kavo plas en ho kichen
 e kompagnunez an oll zent.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab.....

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, leun a druez,
 Selaout ar pedennou a gasom beteg ennoh
 evid ho servicher(ez) A... (da geñver deiz-ha bloaz e varo)
 (he maro)
 Ra zeuy ar zakrifis-mañ a beoh hag a veuleudi
 da rei perz dezañ (dezi) e levez ar zent.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

KAN D'AR GOMUNION:

Bez 'ez oh, Aotrou Doue, an diskiuz warlerh al labour
 ar vuez goude ar maro;
 Roit d'or breudeur tremenet
 an eürusted n'eus fin ebed dezi.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue, kinniget on-eus deoh
 or pedennou hag or provou
 evid ho servicher(ez) A...
 Dond a reom c'hoaz d'ho pedi.
 Plijet ganeoh, en ho trugarez
 e(he) nêtaad euz ar pehejou a jomfe c'hoaz d'e (he) zamma
 goude e vuez (he buez) er bed-mañ.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

C) EN AMZER-FASK:KAN D'AN DIGOR: (Diwar Rom 8/II)

Doue hag e-neus savet or Zalver Jezuz a varo da veo
 a roio buez ivez d'or horvou sujet d'ar maro
 dre ar Spered a zo o veva ennom. Alleluia.

PEDENN D'AN DIGOR:

Diskouezet ho-peus deom, Aotrou,
 pegen braz eo ho karantez
 pa blijas gand ho Mab gouzañv evidom
 beteg mervel war ar groaz.
 Hirio e kontom c'hoaz war ho karantez ha war ho kalloud:
 Roit d'ho servicher(ez) A... or breur (c'hoaz)
 ar hras da gaoud, eñ ivez, (hi ivez) an treh war ar maro
 ha da gaoud perz e buez ar Krist adsavet da veo.
 En hag a zo Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

WAR AR PROVQU:

Aotrou Doue, gallouduz ha trugarezuz,
 plijet ganeoh dre wad an Aotrou Krist
 kinniget en overenn-mañ
 gwalhi ho servicher(ez) A... euz e behejou(he fehejou)
 Ra zeuy ho madelez da nêtaad c'hoaz
 an hini ho-peus lakeet da dremen dre zour ar vadiziant
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

KAN D'AR GOMUNION: (Yann 6/51-52)

"Me eo ar bara beo, a zo diskennet euz an neñv, eme Jezuz;
 Ar bara a roin, va horv eo da rei buez d'ar bed;
 an neb a zebro euz ar bara-ze a vevo da viken." Alleluia.

GOUDE AR GOMUNION:

Perz on-eus kemeret, Aotrou, e sakramant ho Mab
 maro evidom hag adsavet da veo er hloar,
 hag ho-pedi a reom evid ho servicher(ez) A...
 Grit ma vo gwalhet e Pask an Aotrou Krist
 ha m'e-no(m'he-do) da lod gloar an dud salvet
 pa zeuy euz an adsao da veo.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

D) PEDENNOU ALL EVID AN OVERENN DEIZ-HA-BLOAZ.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, ho servicher(ez) A... or breuz (c'hoar)
 e-neus (he-deus) bepred kontet war ho trugarez.
 Dre basion zantel ho Mab
 roit dezañ (dezi) ar pardon a c'hoantae:
 Neuze e hello hoh anaoud e gwirionez
 ha kaoud levenez ouz ho kweled da viken.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag

pe: Aotrou Doue oll-halloudeg,
 dre Jezuz Krist, ho Mab o vervel war ar groaz
 ho-peus destrujet ar maro;
 Dre Jezuz Krist oh adsevel leun a hloar
 ho-peus roet deom eur vuez nevez peurbaduz;
 Selaouit bremañ ouz or pedenn
 evid A... a zo maro en Aotrou Krist
 hag a zo o hortoz an adsao da veo,
 eñ (hi) hag e-neus (he-deus) hoh anavezet dre ar feiz er bed-
 mañ.

Grit ma rento gloar deoh eb ehan
 e levenez ar baradoz.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, kinnig a reom deoh an overenn-mañ
 en eur bedi ahanoh evid ho servicher(ez) A...,
 Roet ho-peus dezañ (dezi) sklerijenn evid hoh anaoud er béd-mañ,
 roit dezañ(dezi) bremañ al levenez da veva ganeoh da viken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

Buez ha nerz a roit deom, Aotrou,
 gand ar zakramant-mañ.
 Grit ma vo talvouduz ivez evid ho servicher(ez) A...
 ma teuio d'e walhi (d'he gwalhi) euz e oll behejou(he oll fehe
 ha da zigeri dezañ(dezi) dor ho Rouantelez. jou)
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

E)-PEDENNOU ALL EVID AN OVERENN DEIZ-HA-BLOAZ:

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, da geñver deiz-ha-bloaz maro A.
 e teuom d'ho pedi.
 C'hwi hag a oar kaoud truez ouz ar re a ya d'ar bed all
 hag ouz ar re a jom da stourm war an douar:
 Deuit d'or frealzi en eur zigemer or breur(c'hoar)
 e peoh ho paradoz,
 ma hello, pelloh, gweled gand e zaoulagad(he daoulagad)
 ar sklerijenn n'hell den he gweled er béd-mañ.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab....

WAR AR PROVOU:

Grit digemer vad, Aotrou, d'ar pedennou ha d'ar provou
a ginnigom deoh evid ho servicher(ez) A...:
Grit ma talvezint dezañ (dezi) en ho kichen
levenez barr da viken.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue meurbed trugarezuz,
erbedi a reom deoh eur wach c'hoaz ho Servicher(ez) ..
on-eus kinniget evitañ (eviti) ar zakrifiz a veuleudi.
Dre nerz ar zakramant, deuit d'e walhi (d'he gwalhi) a beb pehed
ha roit dezañ (dezi) en ho madelez
eürusted ar sklerijenn beurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

D'AN 2 A VIZ DU (GOUEL AN ANAON)

An 2a viz du a gouez, bloaveziou a vez, da zul, med neuze zoken e vo
greet gouel ar memor euz an oll dud tremenet. Setu amañ an overennou a
vo greet implij anezo.

-I-

KAN D'AN DIGOR: (I Tess. 4/I4; I Kor. 15/22)

Evel m'eo marvet Jezuz hag adsavet da veo, evel-se ivez
ar re a zo eet en o housk e Jezuz, o Doue o hemero gantañ.
Evel m'eo en Adam e varv an oll, evel-se ivez eo er
Hrist eh adkavo an oll ar vuez.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, selaouit gand madelez ouz or pedennou:
grit ma kredim startoh en ho Mab adsavet a-douez ar re varo
Evid ma vo brasoh an esperañs on-eus
eh adsavo da veo oll or breudeur tremenet.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

WAR AR PROVOU:

Sellit gand madelez, Aotrou,
ouz ar provou a ginnigom deoh !
Grit ma vo digemeret an oll dud tremenet
gand ho Mab en ho Rouantelez.
En hag a zeu d'on unani etrezom
dre ar mister euz e garantez,
Doue beo ganec'h ha gand ar Spered Glan
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

KAN D'AR GOMUNION:

(Yann II/25 - 26-)

"Me eo an adsao da veo hag ar vuez, eme an Aotrou,
an neb e-neus feiz ennon, ha pa ve marvet a vevo; ha kement hini
a vev gand feiz ennon ne varvo ket da viken."

GOUDE AR GOMUNION:

Ni ho ped, Aotrou Doue,
evid or breudeur eet d'ar bed all;
Grit ma tremenint en ho temeurñs a sklerijenn hag a beoh,
rag evito eo on-eus lidet sakramant ar Pask
Dre Jezuz -Krist, or Zalver. AMEN.

-II-

KAN D'AN DIGOR: (4 Esd. 2/34-35)

Eur sklerijenn heb diskar
a skedo evid ho servicherien, Aotrou,
Beva 'raint da viken.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, gloar an dud fidel ha buez an dud just,
c'hwi hag ho-peus on dasprenet
dre varo hag adsao da veo ho Mab,
Bezit trugarezuz e kenver ho servicherien tremenet;
ha peogwir o-deus kredet e mister on adsao da veo
grit m'o-dezo perz en eürusted beurbaduz.
Dre or Zalver Jezuz-Krist, ho Mab hag on Aotrou
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue oll-halloudeg ha trugarezuz,
plijet ganeoh, dre ar zakrifis-mañ,
gwalhi euz o fehejou, e gwad an Aotrou Krist,
ho servicherien tremenet.
Nêteet int bet gand dour ar Vadiziant,
ra vint bremañ peur-nêteet gand graz ho pardon.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN. ù

KAN D'AR GOMUNION:

(cf. 4 Esd. 2/35-34)

Eur sklerijenn heb diskar
a skedo evid ho servicherien, Aotrou,
Beva 'raint da viken.

GOUDE AR GOMUNION:

Resevet on-eus, Aotrou Doue, sakramant ho Mab unganet,
bet lakeet d'ar maro evidom hag adsavet er hloar;
Ni ho ped a galon evid ho servicherien tremenet;
grit ma vezint gwalhet gand misteriou ar Pask
ha ma savint endro leun a hloar.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

-III-

KAN D'AN DIGOR (diwar Rom. 8/II)

Doue hag e-neus savet Jezuz a-douez ar re vao
 a roio buez ivez d'or horvou sujet d'ar maro
 dre e Spered a zo o veva ennom.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus laket ho Mab unganet
 goude beza trehet ar maro,
 da dremen d'an neñv;
 Grit d'ho servicherien tremenet
 goude beza trehet war ar bresk m'eo traou ar bed-mañ
 mond d'ho kweled da virviken
 C'hwi, o hrouer hag o Zalver
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

WAR AR PROFOU:

Digemerit, Aotrou Doue, gand madelez,
 ar brovadenn a ginnigom deoh
 evid an oll dud tremenet en Aotrou Krist
 Dre ar zakrifis dispar-mañ;
 Grit dezo beza dilivret euz dalh ar maro
 ha kaoud lod er yuez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

KAN D'AR GOMUNION: (Filip. 3/ 20-21)

Gortoz a reom evel salver, Jezuz Krist, on Aotrou,
 Eñ hag a jeñcho doare d'or horfou dister
 hag o lako p ar d'e gorr gloriuz.

GOUDE AR GOMUNION:

Goude m'en-eus resevet ar gomunion,
 ni a zeu, Aotrou Doue d'ho pedi.
 Plijet ganeoh skuilh a-fonn ho trugarez
 war ho servicherien tremenet;
 Roet ho-peus dezo gras ar vadiziant,
 Roit dezo bremañ levenez barr er baradoz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

OVERENNOU ALL EVID AN ANAON.

A-EVID EUN DEN TREMENET:

KAN D'AN DIGOR:

KAN D'AN DIGOR:

An Aotrou a zigoro d'or breur (c'hoar) dor ar Baradoz hag a raio dezañ (dezi) antreal er vro n'eus mui enni a varo med bepred o vleunia, levenez peurbaduz.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, evid ar vuez ho-peus or hrouet
hag ar maro n'heli ket herzel ouzoh.
Or fiziañs ennoh ho-peus gwriziennet
e mister Kroaz ho Mab Jezuz,
hag or merket ho-peus evid atao
gand sin e adsao da veo.
Deuit da zilivra A..., or breur (c'hoar)
diouz kement a hell e zelher (he delher) pell diouzoh:
roit dezañ (dezi) lod e levenez ar zent, ho mignoned.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

pe: E-Kreiz or glahar Aotrou, e teuom d'ho pedi gand fiziañs,
C'hwi eo an Doue a vadelez
troet da zelaou ouz pedenn ho pugale.
Bezit soñj euz ar pezh ho-peus greet
evid ho servicher A..., or breur (c'hoar)
Da zeiz e vadiziant (he badiziant) ho-peus hen digemeret en ho pobl,
Bremañ p'e-neus (p'he deus) kuiteet ahanom
roit dezañ (dezi) lod e levenez ar zent, ho mignoned
ha plas en ho kichen e bro ar peoh hag ar sklerijenn
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

WAR AR PROVOU:

Bezit truez, Aotrou Doue, ouz ho servicher (ez) A...
a ginnigom evitañ (eviti) ar zakrifis a veuleudi.
Ra zeuio dezañ (dezi) diwar ar brovadenn-mañ a beoh hag a bardon
ar hras da adsevel da veo evid ar vuez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

KAN D'AR GOMUNION: (Yann 6./37)

"Kement hini a ro din va Zad a zeuio davedon, eme Jezuz
hag an hini a zeu davedon, ne daolin ket anezañ er mêz."

GOUDE AR GOMUNION:

Renevezet gand ar Zakramant a ro buez
ni ho ped, Aotrou, evid or breur (c'hoar) A...
Peogwir ho-peus e zigemeret (he digemeret) e pobl an Emgleo nevez,
grit ma vo gwalhet gand an overenn-mañ
ha m'e-no (m'he-do-) lod ellevenez- peurbaduz
e peoh an Aotrou Krist.
Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spæred Glan
a-oll viskoaz da virviken. AMEN

B)-EVID EUN DEN TREMENET:KAN D'AN DIGOR: (Job 19/ 25 26)

Gouzoud a ran ez eo beu va Dasprener
hag eh adsavin euz an douar d'an deiz diweza;
ha gand va horv e welin va Doue.

PEDENN D'AN DIGOR:

N'eus nemedoh, Aotrou, hag a ve treh d'ar maro,
ni n'hellom nemed e houzañv.
An droug n'e-neus galloud ebed warnoh
med klask a ra or gwaska.
Bezit soñj e oa or mignon(ez) A... diskibl d'an Aotrou Krist,
deuit d'e (he) nêtaad a beb pehed:
Da zeiz an adsao da veo er hloar
e hello kemer plas e-touez ar zent.
ha beva ganeoh da viken.
Dre or Zalver, Jezuz Krist, ho Mab hag....

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, selaouit ouz or pedenn evid ho servicher (ez) A...
Ra dalvezo dezañ (dezi), evid e zilvidigez,
ar zakrifis a ginnigom deoh,
peogwir eo feññet ganeoh e ve pardonet pehejou ar bed
dre zakrifis ar groaz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

KAN D'AR GOMUNION: (Yann 6/50)

"Setu amañ, eme Jezuz, ar bara diskennet euz an neñv;
an neb a zebro euz ar bara-se a vevo da viken."

GOUDE AR GOMUNION:

Ar zakrifiz kinniget gand hoh Iliz, Aotrou,
ra zeuio war zikour ho servicher (ez) A...
Peogwir e-neus (he-deus) kemeret perz e sakramant a garantez an Aotrou
grit m'e-no(m'he do-*)perz ivez, assemblez gand ar zent, Krist
en ho kloar da viken er baradoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

C) EVID MEUR A HINI PE EVID AN OLL DUD TREMENET:KAN D'AN DIGOR:

D'an oll vreudeur tremenet, Aotrou,
 Roit ar peoh peurbaduz
 ha kargit o eneou a splannder.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, red eo bet d'an Aotrou Krist tremen dre ar maro
 evid beza treh dezañ,
 araog mond da hloar an neñvou;
 Grit bremañ evid ho servicherien (A. hag A.)
 ar pez ho-peus greet evid ho Mab:
 Grit ma vezint, int-i ivez treh d'ar maro
 ha ma hellint mond d'ho kweled en ho kloar
 c'hwi hag a zo o zad hag o zalver.
 Dre or Zalver Jezuz, ho Mab hag...

pe: Aotrou Doue, gand an oll dud fidel e plij deom o pedi
 c'hwi, on Tad hag or Zalver.
 Tad ha Zalver ar re o-deus kuiteet ar bed-mañ;
 Roit dezo ar pardon euz o oll behejou;
 Grit m'o-dezo, euz ho perz, trugarez,
 hervez m'eo bet bepred o esperañs.
 Dre or Zalver, Jezuz Krist, ho Mab hag...

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, taolit eur zell a vadelez
 war ar zakrifis a ginnigom evid ho servicherien:
 Roet ho-peus dezo donezon ar feiz
 Roit dezo bremañ eun digoll kaer er Baradoz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

KAN D'AR GOMUNION: (I YANN 4/9)

E Vab unganet e-neus Doue kaset er bed,
 deom da gaoud ar vuez drezañ.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue, dre ar zakrifis on-eus kinniget deoh
 skuillit puill ho trugarez war oll or breudeur tremenet:
 Er vadiziant o-deus resevet ho hras
 roit dezo bremañ perz en ho levenez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

pe: Plijet ganeoh, Aotrou Doue, e teufe or pedennou
 war zikour ho mignoned tremenet:
 Dre an overenn-mañ dilamit o fehejou
 ha grit dezo kaoud lod e frouez ar zilvidigez.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

D) EVID MEUR A HINI, PE EVID AN'OLL DUD TREMENET:KAN D'AN DIGOR:

Ken braz eo bet karantez Doue evid an dud
 m'e-neus roet e Vab unganet;
 Evelse, kement den a gred ennañ ne'z ay ket da goll
 med e-no ar vuez peurbaduz.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, bepred oll-halloudeg,
 c'hwi a zo buez an dud sujet d'ar maro
 ha levenez ar zent;
 Ho pedi a reom a galon izel evid ho servicherien A...hag A...
 ma vo torret evito liammou ar maro
 ha m'o-devo perz en ho rouantelez a hloar da viken.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

pe: Aotrou Doue, bepred oll-halloudeg,
 c'hwi hag a zo mestr war an oll dud, pe veo, pe dremenet,
 ha leun a drugarez evid peb-hini;
 Dond a reom d'ho pedi evid ho servicherien;
 en ho trugarez, pardonit dezo o fehejou
 ma vezint eüruz ganeoh
 ha ma kanint ho meuleudi da viken.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag....

WAR AR PROVOU:

Digemerit gand madelez, Aotrou,
 ar brovadenn a ginnigom deñ evid ho servicherien A...hag A...
 Hag evid an oll dud a renoz en Aotrou Krist;
 Dre ar zakrifiz dispar-mañ
 grit ma vint diliammet euz ar maro
 ha m'o-do ar vuez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

u

KAN D'AR GOMUNION:

Gortoz a reom evel Salver Jezuz Krist, on Aotrou,
 eñ hag a jeñcho doare d'or horvou distar
 hag o lako par d'e gorv gloriuz.

GOUDE AR GOMUNION:

O kemer perz en ho misteriou sakr, Aotrou Doue,
 e houlennom diganeoh ma talvezint da zilvidigez evidom
 ha da bardon evid an dud tremenet
 a bedom evito ho trugarez
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

E) EVID MEUR A HINI, PE EVID AN OLL DUD TREMENET.KAN D'AN DIGOR: (Disk. I4/I3)

Eüruz ar re varo a varv en Aotrou.
 D'o heul ez a o oberou:
 Bremañ e tiskuižont euz o foaniou.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi a zo evid peb tra ar vuez;
 Dre hraz ho karantez eo e teu ho tud fidel
 da drehi war ar maro ha da gavoud ar peoh;
 Dizoñjit pehejou ho servicherien A...hag A...
 ha pehejou ar re oll a ziskuiž en Aotrou Krist.
 Deuit d'o dizamma euz pouez o fehejou
 evid ma'h adsavint gand an Aotrou Krist.
 Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a oll-viskoaz da virviken. AMEN.

pe: Aotrou Doue, plijet ganeoh pardoni da vad
 d'ho servicherien eet euz ar bed-mañ:
 Ennoh o-deus laket o esperañs hag o feiz,
 Roit dezo eta an eürusted beurbaduz.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, taolit eur zell a vadelez
 war ar provou a ginnigom deoh
 evid ma kavo ho servicherien ar peoh:
 Dre ar zakramant-mañ hag a zo silvidigez ar bed
 kemerit anezo e renk an dud salvet
 en ho rouantelez da viken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

KAN D'AR GOMUNION:

Ar zoñj euz on tud tremenet eo he-deus or bodet
 evid reseo korv ha gwad an Aotrou Krist;
 Roit dezo, Doue mad-meurbed, ar peoh da viken.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue madelezuz meurbed,
 resevet on-eus diganeoh sakramant ar zilvidigez
 hag e teuom c'hoaz d'ho pedi:
 Ra vo evidom eur zikour e peb mare
 hag evid ar re o-deus or huiteet
 eur feunteun a bardon da viken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

pe: Roit, Aotrou Doue, d'ho servicherien
 ha d'ar re oll a ra o diskiuz en Aotrou Krist
 ar hraz da antreal er sklerijenn beurbaduz
 a welent dija er zakramant-mañ.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

PEDENNOU ALL EVTO AN DUD TREMENET

(Evid lod digouezou.)

A-EVID AR PAB:

-I-

KAN D'AN DIGOR:

Aotrou, c'hwi 'zo eun Doue leal
 a zigoll peb-hini diouz e oberou;
 dibabet ho-poa ar Pab A...
 da gemer karg an abostol Pêr,
 ha da veza Pastor hoh Iliz.
 Peogwir eo bet er béd-mañ eur zervicher mad
 euz misteriou ho trugarez,
 grit dezañ bremañ tañva frouez e labour
 e levenez ho Rouantelez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

WAR AR PROVOU:

Ni ho ped, Aotrou, on Doue,
 ra zeuy ar zakrifis a beoh hag a drugarez
 kinniget evid ho servicher ar Pab A...
 d'e zikour da gaoud eun digoll a eürusted
 ha da dalvezoud deom ho kras santel
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

Renevezet gand ar zakramant-mañ
 a zeu d'on unani ganeoh
 ni ho ped, Aotrou, evid ho servicher ar Pab A...
 Peogwir ho-poa e zibabet evid beza war an douar
 maen-diazez an unaniez en hoh Iliz,
 roit dezañ bremañ digemer
 e kompagnunez an dud salvet.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

-II-

KAN D'AN DIGOR:

Plijet eo ganeoh, Aotrou Doue,
 e vefe ar Pab A... pastor hoh Iliz.
 Peogwir eo bet karget war an douar
 da vlenia an Iliz en ano an Aotrou Krist
 Grit ma vo bremañ digemeret gand Jezuz
 e gloar ho Rouantelez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab.....

WAR AR PROVOU:

Taolit eur zell a garantez, Aotrou,
 war brovou hoh Iliz ouz ho pedi,
 Ha dre halloud an overenn-mañ,
 roit d'ho servicher, ar Pab A...
 bet lakeet ganeoh e penn ho pobl santel,
 al levenez da gemer plas e-touez an dud salvet.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

O reseo, Aotrou Doue,
 ar vagadurez roet deom gand ho karantez
 ni hoh asped evid ar Pab A...
 Ra vo digemeret e gloar ar Zent
 evid beza bet war an douar
 servicher feal ho misteriou
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

-III-

PEDENN D'AN DIGOR:

Pastor peurbadel, Doue treh d'ar maro
 selaouit gand evez pedennou ho pobl
 oh erbedi deoh ar Pab A...
 Peogwir e-neus labouret evid hoh Iliz gand karantez,
 roit dezañ ha d'ar re oll ho-peus fiziet ennañ
 an digoll prometet d'ar zervicherien feal ha mad.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab...

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, taolit eur zell a vadelez
 war ar brovadenn a ginnig deoh ho pobl
 en eur ho pedi evid ho servicher ar Pab A...
 Poaniet e-neus da lakaad da ziwan ha da greski,
 e famill vraz mad-den,
 ho peoh hag ho karantez;
 Grit dezañ bremañ kutuill frouez e labour
 a-unan gand ar zent, e levenez ar baradoz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

Bodet endro d'an daol-mañ,
 e-leh ho-peus roet deom, Aotrou,
 bara ar vuez peurbaduz,
 ni ho ped evid ho servicher, ar Pab A...
 starteet e-neus ho pobl er feiz,
 Grit ma skedo bremañ dirazañ ar wirionez en he haër.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

EVID EUN ESKOB.B-EVID ESKOB AN ESKOBTIKAN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, plijet ganeoh rei d'ho servicher A.
 ho-poa roet deom da eskob,
 an digoll euz e labour
 hag al levenez peurbaduz ganeoh er baradoz.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab...

WAR AR PROVOU:

Ni a erbed deoh, Doue madelezuz,
 on eskob A...
 Ar zakrifis a ginnigom deoh evitañ
 eo an hini a ginnige e-unan evid or zilvidigez;
 ra dalvezo dezañ bremañ da bardon ha da drugarez.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

Ni ho ped, Aotrou, da veza trugarezuz
 e kêrver on Eskob A...;
 E Jezuz Krist e-neus lakeet e esperañs
 diskleriet e-neus e feiz emañ o prezeg an Aviel;
 Grit dezañ, dre ar zakrifis-mañ,
 beza gand an Aotrou Krist, da viken.
 Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

C) EVID EUN ESKOB:PEDENN D'an DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus galvet
 da veza eskob (kardinal) A...
 evid ma kendalho karg an Ebestel
 Grit m'e-no perz bremañ en o levenez peurbaduz
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab...

WAR AR PROVOU:

Grit digemer vad, Aotrou, d'ar zakrifis a ginnigom deoh
 evid ho servicher (ar kardinal) A...(eskob A...):
 Fiziet ho-poa emañ ar garg a eskob,
 grit dezañ beva bremañ e kompagnunez ar zent
 e rouantelez an neñvou.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue, trugarezuz meurbed,
 ho pedi a reom evid ho servicher (ar kardinal) A...
 Fellet eo bet ganeoh e lakaad
 e penn Iliz A... en ano an Aotrou Krist.
 Bremañ p'eo bet glanneet gand an overenn-mañ
 grit dezañ azeza ouz taol ar Rouantelez gand an Aotrou Krist,
 Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

D) EVID EUR BELEG:

-I-

PEDENN D'an DIGOR:

Erbedi a reom deoh, Aotrou, ho servicher A...
 ho-poa dibabet e-touez an dud evid beza beleg.
 Asantet e-neus mond d'ho heul
 dre garantez evidoh ha dre garantez evidom.
 Poaniet e-neus da zastum ho pobl
 ha da brezeg an Aviel.
 Bremañ p'e-neus echuet e labour war an douar
 roit dezañ ar peoh hag an eürusted
 e -kichen e Vestr, Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

WAR AR PROVOU:

Selaouit, Aotrou, ar pedennou a gasom beteg ennoh
 evid ar beleg A... ho servicher:
 Roit dezañ bremañ dre an overenn-mañ
 ar hras da weled en o splannder
 ar misteriou e-neus lidet war an douar
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

Bremañ, p'on-eus resevet ar zakramant a zilvidigez
 e pedom, Aotrou, ho trugarez evid ar beleg A...Ho servicher ;
 E garget ho-poa da ingala d' an dud war an douar
 pinvidigeziou ho kras;
 Grit ma kavo bremañ er baradoz
 sklerijenn splann ar wirionez en ho rouantelez.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

-II-

PEDENN D'AN DIGOR:

En ho madelez, Aotrou, selaouit ouz or pedennou
 evid silvidigez ar beleg A...ho servicher:
 Peogwir e-neus labouret gand aked
 da rei da anaoud hoh ano d'e vreudeur,
 plijet ganeoh e zigemer e kompagnunez ar zent,
 en ho paradoz da viken.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

WAR AR PROVOU:

En eur ginnig deoh, Aotrou, an overenn-mañ
 evid silvidigez ar beleg A.... ho servicher,
 e pedom ho madelez !
 Gand feiz ha karantez e lavare an overenn
 grit ma teuio bremañ sakramant an aoter
 d'e zantellaad da vad.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

Kemnerzet gand ar gomunion-mañ
 e teuom d'ho pedi, Aotrou Doue:
 Dre an overenn-mañ, roit d'ar beleg A.... ho servicher,
 Eñ hag e-neus labouret evid ho kloar,
 al levenez d'ho kweled bremañ en ho splannder.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

E) EVID EUN AVIELER:PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag a laka e kalon an dud
 ar c'hoant da rei ha d'en em rei evid o breudeur,
 lakeet ho-peus ho servicher A... e renk an avielerien
 evid servicha an Iliz;
 Roit dezañ bremañ an eürusted en ho Rouantelez, da viken.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

WAR AR PROVOU:

Bezit truez, Aotrou, ouz ho mignon A...
 a ginnigom an overenn-mañ evid e zilvidigez;
 Roet e-neus e vuez da zervicha an Aotrou Krist
 er garg a avielier:
 Roit dezañ ar hras da adsevel da veo evid ar hloar beurbaduz
 e kompagnunez ar re oll a zo bet ho servicherien fidel.
 Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

C'hwi hag ho-peus roet deom gand largentez
 ho tonezonou zakr,
 ho pedi a reom evid ho servicher A...
 galvet ganeoh da veza avielier en hoh Iliz
 Grit dre an overenn-mañ
 ma vo diwallet diouz galloud ar maro:
 grit dezañ kaoud perz e levenez ho Rouantelez
 gand ar re oll o-deus labouret evid ho kloar.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

F)

EVID EUL LEANEZ (PE LEANEZ)PEDENN:

Ho pedi a reom, Doue oll-halloudeg evid ho servicher (ez) A...
 e-noa (he doa) en em ouestlet d'ar garantez parfed
 dre garantez evid an Aotrou Krist:
 Grit dezañ(dezi) tridal gand al levenez
 da zeiz ho tonedigez er hloar;
 ha kaoud perz en eürusted peurbaduz ho Rouantelez
 e kompagnunez e vreudeur (he c'hoarezed) da viken
 Dre or Zalver Jezuz Krist ho Mab hag...

G) EVID EUN DEN TREMENET.

-I-

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, ganeoh e vev da viken ar re a zo maro
 hag ennoh e kav ar zent,
 pelloh aneurusted.
 Ni ho ped, evid ho servicher (ez) A...
 Serret eo bremañ e zaoulagad (he daoulagad) ouz sklerijenn ar
 béd-mañ,
 Grit ma kavo, ganeoh, ar sklerijenn beurbaduz.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN.

WAR AR PROVOU:

Grit digemer vad, Aotrou Doue,
 d'ar zakrifis a ginnigom deoh hirio
 evid ho servicher (ez) A...
 Grit ma kavo en ho trugarez ar pardon a espere,
 m'e-no (m'he-do) perz e levenez ar zent
 ha ma kano meuleudi deoh da viken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

GOUDE AR GOMUNION:

En eur reseo ho tonezonou euz an neñv,
 e rentom deoh, Aotrou, gloar ha trugarez
 hag ho pedom evid ho servicher (ez) A...
 Dre basion ho Mab,
 grit ma vo diliammet euz e behejou(he fehejou)
 ha roit dezañ (dezi) ar hras da vond davedoh.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

-II-

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, ra bigno or pedenn beteg ennoh
 ha ra gavo ho servicher (ez) A... al levenez peurbaduz:
 C'hwi hoh-unan ho-peus krouet anezañ (anezi)
 diouz ar skeudenn ahanoh
 hag e (he) lakeet e renk ho pugale.
 Grit dezañ (dezi) bremañ kaoud perz
 en hoh heritaj peurbaduz.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag....

WAR AR PROVOU:

Grit digemer vad, Aotrou,
 d'ar brovadenn a ginnigom deoh gand fiziañs,
 evid ho servicher (ez) A...
 Dre ar zakrifis a ro ar pare d'an dud
 roit dezañ (dezi) ar zilv-digez a bado da viken
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue, c'hwi hag a zeu d'or hennerza
 gand ar bara euz an neñv,
 ni ho ped evid or breur (or c'hoar) A...
 Grit ma vo diliivret euz liammou ar maro
 ha m'e-no (m'he-d-) ar joa da adsevel da veo gand ho Mab.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

-III-

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag a oar truezi
 selaouit or pedenn;
 Roit d'ho servicher (ez) A... ar pardon euz e behejou (he fehejou)
 evid ma vo, da zeiz an adsao,
 beo hag eürus e splannder ho kloar, da viken.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag...

WAR AR PROVOU:

Fellet eo ganeoh, Aotrou, e teufe ho Mab
 d'en em lakaad etre on daouarn
 evel bara a vuez,
 ha da skuill evidom e wad
 evel evaj a zilvidigez;
 Ho-pet truez ouz ho servicher (ez) A...
 ha plijet ganeoh dre ar zakrifis-mañ
 rei deza fi (dezi) ar zilvidigez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.


GOUDE AR GOMUNION:

O reseñ an arrez-mañ euz ar vuez peurbaduz
 ni ho ped, Aotrou, evid ho servicher (ez) A...
 Grit ma vo diliivret euz liammou ar maro
 ha m'e-no (m'he-do) plas e kompagnunez ar zent, da viken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.




Tridal a ra va halon

Chant de Pâques. Texte: Roger Abjean d'après Ex. 15/1.6
Musique: Choral gallois "Mor Fawr Wyt ti". Répertoire du Chœur de Trégeron




1 { Ka-na a rin, Ka-na a rin be. pred, rag an ao. troue-neuz va zan tel
En eo va nerz en eo i-vez va zad, en eo va han Ka-na a rin e



1 { let hloer
Tri-dal a ra va ha-lon e Dou. e ha va e-



ne zoleun a joa, kroua-du rien, meulit e va-de-lez. Al-le-lu-



ia, al-le-lu ia



2

Brezelour braz eo ive an Aotrou
Kaloneg eo, "An Aotrou" e ano
Stlapet e neus an enebour er mor
Diskennet int e dounder ar stradou

3


Ho torn dehou a zo brudet e nerz
Ho torn e-neus flastret an enebour
Ha c'hwi, Aotrou, a reno war ar bed
C'hwi a reno bepred ha da viken.

JERUSALEM

Andante Moderato




Soliste 1. La oan kousketan noz man, na kaer oa va hun.vré : e




ker Je.ru.sa.lem e oan di . rag i . liz Dou.e me gle ve mouezioula.ouen an



oll vu.ga.li.gou hag euz an nêv o tis.kenn son flour an ta.len.nou hag




euz an nêv o tis.kenn son flour an ta.len.nou




CHŒUR

Je . ru.sa.lem, Je . ru.sa.lem Se . tu deut an Ao . trou, Ho



-san.na, Ho san.na, ho san.na da vi . ken




Soliste


p 2. Neu . zé teu as eun hun.vré all:ar bed a oa siou.leet, ne



gle-ven mui so.niou drant a ga-ne an é.led ku.zet an heol,ten.val andeiz, gla



ha-ret an dou.ar, ha skeudar groaza ba.re war beg me.nez kal.var



Chœur

Ha skeudar groaz a ba . re war beg me . nez kal . var . Je . ru . sa .

ru . sa . lem

lem Je . ru . sa . lem sa . vet eo Ma . den Ho

rf

3

san . na Ho san . na ho san . na da vi . ken

Soliste 3 . Neu . ze we . lis eur vro dis . par , rou . an . te . lez Dou . e hag

oll po . blou an douar o vond war . zw an neuv ar bed a oaskle . ri . j en . get en

eur hiz du . di ur an Ao . trou a . ze . zet war e . drou lu . ger . nuz

Chœur. Bo . det int di . rag tron Doue ka . na me . leu . di : Je

pp

ru . sa . lem , Je . ru . sa . lem a ba . do da vi . ken Je

rf

rall. Allarg 3e

ru . sa . lem , Je . ru . sa . lem ba . do da vi . ken , Je . ru . sa

ru . sa . lem *Semp. ff*

lem ja . ru . sa . lem, Je . ru . sa . lem, ka . nom oll d'an Ap . trou . Ho

san . na , Ho - san . na , Ho san . na e barran nen - vou , Ho

ff san . na da vi . ken . Ho . san . na da Vi - ken

"Jerusalem" est un chœur célèbre du répertoire gallois.
 "The Holy City" poème anglais de F.E. Weatherly.
 Musique de Stephen Adams.
 Arrangement pour baryton solo et chœur mixte de R. Abjean
 Texte breton : A. Marc.

